

AR LOSTGERIOÙ KALETAUZ

1. REOLENN AN DIVERADUR

E meur a yezh (galleg, alamaneg...), evid gouied skriv ar gensonenn dibenn-ger e vez staget ur lostger douzh ar pennged (*grandir* > **grand** ; *sottise* > **sot** ; *potier* > **pot**). Evel-se e raer e brezhoneg ive, evid an anvioù-kadarn d'an nebeutañ :

- bag	abalamour da	< bagad , bagoù , bigi
- dous	" "	< dousig
- klas	" "	< klaoù , klasel
- pesked "	" "	< peskedenn , peskeduz .
- plouz	" "	< plouzenn , plouz
- tad	" "	< tadoù , tadig , tadelezh
- skrivet e vez -ig gant ur -g abalamour ma vez sanet ar [g] er gerioù diveret : korrig an (kor + -ig + -an).		

Mez ne heulia ket ar peurunvan (P-1941) an diveradur evid ar gerioù arall. Setu perag e skriver an anvioù-gwan, an araogennoù, an anvioù-verb h.a. gant ur gensonenn galed :

***blot**, ***sot**, ***brezhonek**, ***gallek**, ***glas**, ***bras**, ***fallakr**, ***start** (...) ; ***bennak**, ***evit**, ***hep**, ***pep**, ***perak**, ***pet**, ***rak**, ***a-raok** (...) ; ***klevet**, ***labourat**, ***redek**, ***tapout**...

Ar reolenn-se, savet e 1902, zo faos ha dañjeruz evid ar brezhoneg **a-gaoz ma parra douzh an diskodañ** a fed hirder ar vogalenn dindan an taol-mouezh (***blot** n'eo ket da vound distaget evel **klot** gant un **o berr** mez evel **lod** gant un **o hir**, setu perag e vehe da vound skrivet **blod**, ar pezh a glot gant an diveradur **blodenn mie**). Ouzhpenn-se e laka diaesoc'h seveniñ ar liammadurioù (keñveriañ ***evit an dud & evid an dud** ; ***blot eo & blod eo** ; ***pet eur ? & ped eur ?**).

2. PERAG AR REOLENN-SE ?

Beteg ar bloazioù 1940 ne ouie ket an dud perag e veze lâret **brazig**, **brazez**, **brazentez** diouzh un tu ha **brasaad**, **brasañ**, **brasoc'h**, **brased** diouzh an tu arall. Ne ouient ket e oa daou sort lostgerioù : **ar re neutr** (nebtueg, un 150 bennag anezhe pe ouzhpenn) hag **ar re galetauz** (ar re-mañ, **9 anezhe**, a laka ar gensonenn a zo en o raog da galetaad, abalamour d'un **h-kozh**, tre evel ma henn gweler c'hoazh é c'hoari e troioù a-sort gant **kig-k ha-farz**, **hed-t ha-hed** pe **glaz-s ha ruz**, **pod-houarn** skrivet ive **pothouarn**).

3. TAOLENN AR LOSTGERIOÙ KALETAUZ (6 + 3 = 9)

DIBENNOÙ-GER	SKWERIOÙ
-A (< -(h)a)	PESKED (peskedenn) mez peskeṭa , peskeṭacr .
-AAD (< -(h)aad)	BRAZ (brazig) mez brasaad .
-AÑ (< -(h)añ)	BLOD (blodenn) mez bloṭañ , an heni bloṭañ .
-OC'H (< -(h)oc'h)	STARD (stardañ) mez startoc'h .
-AD/-ED (< -(h)ad/-(h)ed)	KALED (kaledenn) mez na kaletad ur maen ! (=kaleted)
-AD (< -hed)	MEUD (meudig) mez meutad (< meud-hed un pouce de long)
-HI ;	EGED (egedin) mez egeṭi , egeṭañ , egeṭe
-(h)AÑ	EVID (evidin) mez eviṭi (< evid hi), eviṭañ , evite (evid hē)
-HÈ/-(h)O	DAVED (davedon) mez daveṭi , daveṭañ , daveṭe .
	NEMED (nemedon) mez nemeṭi , nemeṭañ , nemeṭe .

NB : 1) An dibenn **-oni** a vez gwezh kaletauz (**braz**, **braṣoni**), gwezh neutr (**rog**, **rogoni**). E gwirionez? n'eus rezon ebet evid ma ve kaletauz (e brezhoneg e vez lâret **brazoni** ive. Sd. geriadur T. Ar Menteg, 2007).

4. PETRA OBER ?

Evid abegoù pedagogel enta e vo daw skriv rac'h ar gerioù brezhoneg evel mand eo bet skrivet an anvioù-kadarn: **diwar an diveradurioù gant lostgerioù neutr**. Neuze e vo skrivet **ROUZ** (< **rouzig**) ; **DOUS** (< **dousig**) ; **EVID** (< **evidon**, **evidoc'h**) ; **PERAG** (< **peragiñ**) ; **KAUD** (< **kaoudoù**) ; **SELLED** (< **selledoù**)... Adal neuze e vo kempouell ar Peurunvan, aez d'ober gantañ evid kelenn ar peder reolenn diazez sanadur ar brezhoneg.

Jean-Claude Le Ruyet.2017a.2017c.2025a.